

PAROUZ AR C'HOUEC'HED

—
Gwerz
ar Seiz Sant

SANT-BRIEG

Ti Moullerez Sant-Gwilherm, Bali Charner

—
1914

CHAPEL AR SEIZ SANT

Deus ar peder chapel warn-ugent a rê gwechall evel eur gurunen a beder warn-ugent perlezen d'iliz koz Itron Varia Gelou-mad Plouaret nan eus ken nemet c'houec'h en o sav : unan en bourk Plouaret, chapel goant an Itron zantez Barba, chapel maner Kerborn amzer 'zo bet.

Pemp a chom en parouz ar C'houerc'hed :

Chapel sant Fiaer na gont ken ; ne van nemet ar relego anei.

Ar pemp chapel all a zo : Chapel an Drinded Zakr a ve he fardon da zul an Drinded.

Chapel Itron Varia Wir-Zikour ; chapel an otro sant Per, maner koz Gwern-ar-c'ham.

Chapel an otro sant Jili ha chapel ar Seiz Sant binniget ar gaeran dioute o femp. Deus a bell e weler beg moan tour ar Seiz Sant uhel dreist ar blokad gwe kistin a disheol ar chapel hag eur yec'hed eo klevet noz-veure mouez arc'hant kloc'h ar Seiz Sant o kanan, o son an Angelus 'us d'ar c'hoajeier ha d'ar zaonennou glas.

Chapel goz ar Seiz Sant bihan a zo grêt gant eun dôlvên ha war an dôlvên-man eo savet ar chapel nevez a zo bet binniget de gouel Santez Mari-Madalen, an 22 a viz gouere 1703.

Oc'h ober an dro d'ar vered a zo eur voger venerez hag eur zeulbank en traou ar voger, d'an dud d'azean. Pardon ar Seiz Sant a ve groet bep bla d'ar bevare zul a viz gouere.

An de-se e ve oferen veure da c'houec'h eur, oferen bred da dek eur ; ar gousperou hag ar prosision da d'eur.

En feunteun bolzet ar Seiz Sant e sav, e tidarz an dour dre seiz mammem : dour yac'hus ha sklér evel lagad eun ér. Stok d'ar feunteun a zo eur louar vén vihan d'en em walc'hi. Feunteun ar Werc'hez a zo en prad Kerlohou dindan eun derven. . . Er prajeier en-dro d'ar mammennoudour e sav glasoc'h, druoc'h ar yeod med da droc'han.

En-dro da feunteunio ha da chapelio ar zent e koue puilloc'h ive madelezio an Aotrou Doue. Kendalc'homp, eta, d'o darempredi.

Gwerz ar Seiz-Sant

Bretoned ha Kristenien, tostaet da glevet
Eur werz dimeus ar c'haeran, eur werz neve-savet ;
An danve a zo ken kaer, a zo ken burzudus,
Ma lako ho kalonou da dridal evurus.

En Eskopti a Dreger ebarz ar C'hoz-Varc'had,
En doa ar Spered-Santel eur chapel saved mad,
Hep ra, na pri, na mason, na tôer, na kalve ;
Pa deu an den d'he c'hichen e wel ar wirione.

Nan eus ken nemet c'houec'h mèn oc'h ober ar chapel (1),
D'ober d'ezi mogerioù ez eus peder roc'hel,
Diou all a zo en d'ben. Piou 'ta ne gredfe ket
Eo Doue Holl-C'halloudek en deus anei savet !

Er chapel-man, Kristenien, e peder ar *Seiz-Sant* ;
Seiz breur 'oant a renk uhel, tud fur, tud a skiant,
Seiz servichour da Zoue, pa oant war an douar,
Seiz difennour evidomp aboue m'emaint er gloar.

(1) Chapel ar *Seiz-Sant* a zo savet war eun dol-ven. Gouestlet e oa gwechall goz da « Zeiz Sant Breiz », o deus savet hon eskoptioù Breiz. Bezomp sonj d'o fedi evit hon Bro garet.

Ho skeuden a zo ive, Gwerc'hez, hon Mam santel,
En-kreiz etre ar *Seiz-Sant* . . . Bezet 'ta hon skoazel !
Ha pa deuio ar Seiz-Breur evidomp da bedi,
Groet ma teuy ho mab Jezuz kerkent d'hon fardoni.

Me 'gred penós, Kristenien, e vefet aketus
Da enori el lec'h-man ar Seiz-Breur evurus,
Ha da welet ar chapel pehini a zo groet
Hep ra, na pri, na morzol, hep sikour den ebet.

Hag evit heuilh o skoueriou hag ober d'ac'h kompren
Pegement e sent Doue ouz e zervichourien,
E c'houlennont digantan gouzanv evit e c'hloar
Ar poaniou a deurvezfe rei d'è war an douar.

Ar c'hentan eus ar *Seiz-Sant* e oa *Maximian*,
An eil *Marc* hag an driveñ e oa *Martinian*,
Ar bevare *sant Denez*, ha *sant Yan* ar bempved,
Ar c'houec'hved *Serafton*, *Konstantin* ar seizved.

Gwechall e oa eun den kri, Decius 'oa hanvet,
Impalaer ar fallakran a c'hallfed da gavet ;
Ober 'rè merzerja dre-holl ar gristenien,
Dre na c'houlent dianzav o fe hag o c'hreden.

En eur gêr hanvet Efez e oa neuz *Seiz-Breur*,
D'an amzer ma oa en Rom Decius, roue-meur,

O digemenn a reas dre e gannadourien,
O klask ober d'eze nac'h Doue hag e lezen.

Ar *Seiz-Breur* a lavaras krenn d'ar gannadourien
Ne dianzavchent biken Doue, nag e lezen ;
Gwelloc'h e oa d'è kant gwech dilezel o c'hargou,
Evit bezan trubarded ha nac'h o c'hredennou . .

An den fallakr, o sonjal trec'hi enne ar Fe,
A lam digant ar *Seiz-Breur* o c'hargou hep dale ;
Ma talc'hont stard da Jezuz e vefont trubuilhet,
Ha mar nac'hont e lezen e vefont enoret !

Mes kaer en deus nac'h oute kargou ha peadra,
Kaer en deus lakat anè da glask o zam bara,
Touet o deus holl bezan, bezan ar *Seiz-Merzer*,
Kentoc'h evid dianzav Jezuz-Krist, o Salver !

Pan n'en deus ket an den kri gallet donet a-benn
Da zistrei ar *Seiz-Breur* man gant e gannadourien,
Ez eo bet ken kounnaret, ma renk dont e-unan
D'o c'hask ha do c'hastian dre gleze ha dre dân.

Allaz ! o c'havout a ra kuzet en eur c'havern,
Hag, elec'h terri d'eze war an tol o eskern,
E ro urz da vasonat ar c'havern warneze,
Evel pa vijent maro, hag int leun a vue !

— Penós, o den an ifern, gwas a bardedigez !
Gourc'hemen eun dra ken kri en-kenver ar Furnez !
Lakat en beo en douar *Seiz-Breur* a renk uhel,
O deus renet a viskoaz eur vue ken santel . . .

Da vihanan, ma 'z eo red d'ê gouzanv ar maro.
Zo d'eze eur maro skanv, den fallakr ha garo ;
Gwell eo mervel war eur rod pe stag ouz ar potanz
Pe rostet war ar glaou-tan evel eur zant Loranz.

Mes koll an holl sklerijen, bezan beo douaret,
Mervel gant bep dienez, gant an naon, ar sec'hed
A zo eur verzerenti ken heuzus ha ken braz,
N'ez eus nemed an ifern, pe ar purgator waz !

Kristenien leun a galon, n'oc'h-hu ket tenerêt,
O welet *Seiz-Krouadur* en bue douaret ?
Dimeus a greiz o yec'hed hag en o yaouankiz,
Douaret en eur c'havarn ha nan en eun iliz ?

Siouaz ! achu eo d'eze . . . Lezomp-ê da vervel,
Pa n'hallomp ket o zikour ; mes, c'houi, Tad eternel,
Digemeret o ine da viken en ho kloar,
Pa 'z int evit ho lezen plantet beo en douar !

O Doue Holl-C'halloudek, c'houi a viras gwechall
Ar Profet brudet, Jonas, en korf eun aneval ;

Eur pesk hanvet ar Balin her lonkas er mor bras,
Hag er gêr a Ninivez, en tri de, hen rentas.

C'houi a viras Daniel en-kreiz al leoned,
C'houi reas da dri vogel kana 'n eur forn c'horet,
Bremen c'houi a lez *Seiz-Breur*, en eur c'havarn heuzus,
Da vervel 'kreiz ar yec'hed dre urziou Decius.

Seitek vloa hag eiz ugent e chomchont el lec'h-ze,
Ken ma oe divasonet ar c'havarn warneze ;
An neb en devoa klevet e oant eno laket
A zonje e oant maro, pell zo en poultr rentet.

Mes Doue Holl-C'halloudek, pehini na lez ket
Oberou groet evitan hep bezan dic'haouet,
A zigasas ar c'housked er c'havarn d'ar *Seiz-Sant*
Hag o miras en keit-se dimeus poan ha tourmant.

Rak pa oe bet ar *Seiz-Sant* er c'havarn douaret,
Dre aotreadur Doue e krokchont da gousket :
Seitek vla hag eiz ugent 'oant bet hep dihuni,
P'oe digoret ar c'havarn e oant kavet enni !

A boan ma oant bet kavet, dre-holl redas ar brud,
Hag e lakas souezet eun niver bras a dud ;
Ne oa ket hep digare, rak me a gred, biskoaz
Ne oa bet c'hoaz klevet komz eus eur burzud ken braz.

Pa oa klevet ar burzud — ar c'helo oa redet —
An holl dud dimeus Efez a deuas d'o gwelet ;
Holl e taoulinchont eno, ha leun a drugare,
E rentchont meulodiu d'hano santel Doue !

Dre desteni ar plak kouevr, kavet eno gante,
Elec'h ma oa o hano skrivet hag o bue,
En deus permetet Doue, evit e vrasan gloar,
Gouzout pegement amzer e oant bet en douar.

Prestik goude ar maro d'ar *Seiz-Sant* a deuas,
O ineou d'an Nenvou war an tol a nijas ;
Mar n'o deus bet er bed-man nemed poan hag enkreuz,
Da vihanan er bed-all o devo levenez !

Pegen evurus omp-ni, etrezomp, Bretoned,
Dre m'hon deus ken bras tenzor en parouz ar C'houere'hed !
Rentomp grasou d'an Dreinded : Tad, Mab, Spered-Santel,
Da vezan groet d'ar *Seiz-Sant* en hon Bro eur chapel !

Ouspenn ar chapelig koant, c'hoaz ez eus 'n he c'hichen,
Eur feunteun gaer d'ar *Seiz-Sant* hag he deus seiz mammen,
Seiz gwazien dre bere e ro Doue grasou
Hag e ra, en peb amzer, niver a varzudou . . .

An dour-man a grenva kalz an neb zo en yec'hed,
Hag a zistân e boaniou d'an neb en deus klenved ;

Doue a ro d'an ine, d'an ine grasou kaer
Ha d'ar c'horf nerz ha yec'hed dre beden *Seiz-Merzer*.

Eur wreg eus a Blouaret, a barouz ar *Seiz-Sant*,
Katell David he hano, a goueze en droug-sant,
En droug sant Loup e koueze, siouaz, bemde-goulo,
Ma sonjed ne bareche ken na vije maro.

Goude bezan pell amzer evel-se gwall-gaset,
Betek chapel ar *Seiz-Sant* he deus sonjet monet ;
Eno hi he deus kavet louzou ouz he c'hlenved ;
Rak aboue m'eo bet eno, biskoaz n'eo bet kouezet.

Pierez ar Gwillermik dimeus ar C'hoz-Vare'had,
Disec'het gand an derzien a deuas gant e dad ;
Goude bezan bet gwalc'het en dour, herve e c'hoant,
E hadkavas ar yec'hed, trugare d'ar *Seiz-Sant* !

C'hoaz Pierez Kerivoal, a barouz Pluzunet,
A oa gant an droug-gouzoug ive merzeriet ;
Eun nozvez e oa ken fall ma sonjed e varvehe ;
Pa oe gouestlet d'ar *Seiz-Sant*, yec'hed en doa goude !

Tud klanv gant pep seurt klenved, kam, mac'hagnet pe dall,
O vont beteg ar *Seiz-Sant* a gav diboan raktal.
Eur wreg, eus a Blouaret, a gollas ar gwelet,
Kaer he doa klask louzeier, hi ne baree ket . . .

Mont 'reas gant he fried gant gwir devosion,
Evit pedi ar *Seiz-Sant* eus a greiz he c'halon,
He daoulagad a walc'has en dour feunteun ar Sent,
Ma kavas ar sklerijen ken reiz ha diagent.

Arabad eo ankouas ive ar mad-ober
Groet da Vari-an-Allin, groet gand ar *Seiz-Merzer* ;
Ne oa ket en he diou vron peadra da vaga
Ar c'hrouadurig bihan he devoa o tena...

Mont a rés gant eur fe vras da chapel ar *Seiz-Sant*,
Da c'houlen magadurez evid an inosant,
Hag a drugare Jezuz hag e vam, ar Werc'hez,
Teuas kerkent he diou vron da vezan leun a laez !

Daou vab Jakez ar Goffik, a barouz Trebeurden,
A oa enpad nao sizun klanv bras gant an derzien ;
D'ar *Seiz-Sant* e oent gouestlet hag er memes amzer
E kwiteas an derzien hag e teujont seder.

Merc'h Juluan ar Piver, dimeus a Lanhuon,
A oa gant eur c'hlenved kri glac'haret he c'halon,
N'halle ket hec'h-unanik na finval, na kerzet,
He diou-c'har a oa outi kasi maro rentet.

Digaset eo d'ar *Seiz-Sant* gant he mam hag he zad,
Evit ober he feden ha goulen he mennad ;

Elumet 'oe eur golo eviti er *Seiz-Sant*,
Hag e kerzas d'ar feunteun evurus bras ha drant !

Burzudou a rer aman en-kenver peb seurt tud,
An holl, paour ha pinvidik, zoken al loened mud,
A c'houzanv kenies gwech eun nerz vadeleus
Adalek ma vent gouestlet d'ar *Seiz-Breur* galloudus.

Chilaouet a c'hoarvezas gand eun den diskiant,
A deuas da laerez ed da chapel ar *Seiz-Sant* :
Pa oa o c'houren e vec'h, e chom staget outan,
Ken na deu prozesion ar barouz davetan...

Niver bras a vurzudou a c'hallfen displega,
O laret a rafen holl paneved o skwiza ;
Kement am eus lavaret a zo gwir, war ma fe,
Kement o deus bet zikour a destenio ze !

N'en deus lec'h war an douar, pa deuer da bedi,
N'hallfe an Aotro Doue chilaou hon mennad-ni ;
Mes gwir ez eo koulskoude en deus bet dibabet
Lec'hiou dreist al lec'hiou-all da vezan enoret !

Eur chapel groet gant c'houec'h mèn, pell amzer zo savet,
Eur feunteun a seiz mammen, kalz a vurzudou groet,
A ro d'imp skler da welet eo ar *Seiz-Sant* eur plas
En deus dibabet Doue evit rei d'imp e c'hras.

Rak-se, mar hon deveus c'hoant da vonet d'an Nenvou,
Keit ha m'hon devo amzer, klaskomp 'ta an henchou ;
Dastumomp eun eost kaer, kaer, dimeus grasou Doue
Gant aon na vefemp, siouaz, d'hon maro dibourve...

Pleustret ez eo ar Seiz-Sant, bemde enpad ar zun,
Gant tud eus a bep koste, dreist holl enpad al lun ;
Mes bep bla da gentan, zul goude ar Vadalen,
Ez eus pardon, induljanz d'an holl wir gristenien.

An induljanz er bed-man hon dizam diouz ar boan,
A renker er purgator tremen en-kreiz an tân ;
Mui a dalv eün ober-mad tra ma 'z omp en bue
Evit kant vla a flammou da walc'hi hon ine.

Kemeromp lod, Kristenien, ebarz ar grasou ze,
Demp da bardon ar *Seiz-Sant*, demp da bedi Doue ;
Goulennomp eno beva er bed-man ken doujus
Ma vefomp 'barz ar bed-all da viken evurus !!!

Kempennet ha reizet gant An YRODET,
diwar werz koz ar Seiz-Sant

18 C'houevrer 1908.

IMPRIMATUR

Brioci, die 17^a Martii 1908.

Y.-M. AR PENNEC.
Vikel vras.

Kantik Itron Varia Gonsolation

PATRONEZ AR C'HOUARC'HAD

WAR DON : *Kantik Itron Varia a Wir Zikour.*

DISKAN

*Itron Varia Gonsolation,
Hon mamm dous ha madelezuz,
Ar C'houarc'hadiz a greiz kalon
Ho ped d'o ren daved Jezuz. (bis.)*

'Lec'h è savet breman hoc'h iliz,
Ne oa gwechall 'met eur chapel,
Met eno 'vit ar C'houarc'hadiz
C'houi oe bepred eur Vamm fidel.

Eun iliz koant, ha deus ar c'haeran
'Plas ar chapel-ze 'zo savet.
N'eus hini war dro hag a garan
'Vel hoc'h-hini, Mamm vinniget.

Ac'hane diwar ho tron ken kaer
E skuilhet warnomp ho kraso,
Rak ho kalon 'vidomp 'zo tener
Ha prest da glevet hon c'hlemmo.

Ho pezet sonj, ó Gwerc'hez zantel,
A zo bet alies laret :
« Piou bennag da Vari vo fidel
» Vo ganti. zur mad, chilaouet. »

Eus a bep droug hag a bep pec'hed
Miret hon bugale dalc'h-mad :
Ganec'h, Gwerc'hez, pa vefont harpet,
E kerzfomp eeun war an hent mad.

D'an dud yaouank reit gras ar furnez,
'Vit ma c'heuilfont lezen Doue,
Ma vo gante difennet hep mez
O bro, o ine hag o fe.

Groet ma vo en hon tiegezo
An tad hag ar vamm enoret,
Ma reno etre ar priejo
Peuc'h, karante, evurusted.

D'an dud diskaret gand ar c'hlenved
Bezef eur vamm dous ha tener,
Er bed-man pa vefomp trubuilhet
Groet d'hon c'halon bean seder.

Ha pa vo deut bec'h ar blavejo
Da bouezan stard war hon diou skoa,

Goulet pardon 'vit hon pec'hejo
Ha lod eun de eus ar gwir joa.

Hon diwallet eus a bep pec'hed,
Bet 'vidomp eur Vamm a Drue ;
Groet ma vo ganimp brepred trec'het
Holl enebourien hon ine.

Ho pennoz ive war hon farko,
War hon labour, war hon loened ;
Ho pennoz, Gwerc'hez, war hon foanio,
Ma voint ganimp santeleat.

E keit ma vefomp war an douar
Ni a gano ho meulodi,
Rak n'eus nep lec'h, o Mamm hep he far,
Eur galon dous 'vel hoc'h-hini.

Ha pa vo deut hon heur diwean,
Oh ! neuze deut d'hon c'hennerzi,
Ha goude holl drubuilh ar bed-man
Ra 'z aimp d'an Ne 'vit ho meuli.

D. H.

IMPRIMATUR

Brioci, die 5^a Martii 1902,

M. LE PROVOST, vic. gén.

Sant-Brieg. — Ti-moulerex Sant-Gwilherm

